


<http://septdormants-levieuxmarche.fr/Gwerz-ar-Seizh-Sant-en-Parous-Plouared.html>



# Gwerz ar Seizh Sant en Parous Plouared

- Un peu d'histoire - Les Sept Dormants d'Ephèse - Autour de la légende -



Date de mise en ligne : lundi 20 août 2018

---

Copyright © Les Sept Dormants au Vieux-Marché - Tous droits réservés

---

1. Assistantet katholik, tostaet da glevet  
Ur c'hantik spirituel a neve komposet  
Ar sujet a so qen dign deus hoc'h attantion,  
Ma teuy, mar bech attantif, da rei joa d'ho kalon.
2. Mes qent avañs davantach, adresset hol genen  
Ho kalon hag ho peden entreze hag an  
Ha men a rai dac'h gwelet un dra guir ha certain :  
Me gomz dac'h eus un ouvrach nen dê graet gant dom den.
3. En Escopti a Dreguer, en parous Plouaret,  
En devoa ar Speret-Santel ur Chapel batisset  
Hep ra, na pri, na masson, na toer, na kalve :  
N'en deu den d'e bisita ne vel ar virione.
4. N'en deus qen nemert c'huech men oc'h ober ar Chapel,  
Da servichout mogueriou e zeus peder roc'hel,  
Ha diou al so en doñn. Piou na gomprenfe qetet  
Eo Doue ol-buissant en deus-y batisset ?
5. Avis a ra d'am speret penos e c'houlennet  
Pegouls nac en pe feson e zeo bet batisset  
Ha me respont e credan pa voe crouet ar bed,  
An henv, ar mor, an douar, e voe ivez formet
6. Er Chapel-mañ, christenien, e peder ar Seizh Sant ;  
Seiz breur voant, a galite, seiz den fur ha prudant ;  
Seiz servicher da Zoue pa voant var an douar ;  
Seiz avocat evidomp aboe ma maint er gloar.
7. Emañ hocah imac'h ivez, Mam a visericord,  
E creis entre ar Seizh Sant, rac se bet dimp support ;  
Ha pa deuy ar Seiz Breer-mañ evidomp da bidi,  
Grit ma teuy ho Mab Jesus da dont d'or pardoni.
8. Me gred penos, christenien, e viet dilijant  
Da henori er plas-mañ Mari hac ar Seizh Sant,  
Ha da velet ur Chapel pehini a so groet  
Hep ra, na pri, na morzol, na sikour den ebet.
9. C'hoas evit ho imita hac ober dac'h compren  
Pegement e sent Doue eus e servicherien,  
Goul a reont digantañ souffriñ evit e c'hloar  
Ar poaniou a dezirje digas de en douar.
10. Ar c'hentañ deus ar Seizh Sant a voa Maximian,  
An eil Mark, hag an drede a voa Martinian,  
Ar bevare Sant Denes, ha Sant Yan ar bempet,  
Ar c'hoec'hvet Serafion, Constantin ar seizvet.
11. Gwechal e voa un tirant, Decius voa hanvet,  
Impalaer ar c'hruella a guement a gaffet ;  
aber a re tourmanti partout ar gristenien,  
Defot ne garent renoñs d'o fe heza d'o lezen.
12. Er gaer deus a Ephese e voa ivez Seiz Breur,  
D'an amzer ma voa en Rom Decius Ampereur  
a diguemen a eure dre ambassadourien, \_a klask ober de renoñs d'o fe ha d'o lezen.
13. Respont a ra ar Seiz Breur d'an ambassadourien<sup>1</sup>  
Ne renoncint birvigen d'o fe ha d'o lezen ;  
Hag int ha da dilezel noblañs,  
Enem renti vel peorien o clasq an aluson.

14. An tirant c'hoas o sonjal surmonti o c'honstañs,  
A lam o armoriou, o priv deus o nabrañs :  
Mar delhont mat da Jesus e lar o zourmanto,  
Ha mar renonsont dezhan e no .
15. Mes kaer en deus o frivan a bep commodite,  
En eur donet d'o c'hontraign da glask ar charite ;  
Resolvēt int da veza o Seiz Martiriset  
Qent ma quittaent Jesus er groas crucifiet.
16. Bete bremañ an tirant n'en de ket deut a ben  
N'o deus biscoas cometet nep sort mechancete. Da distrei ar Seiz Breur m'n, dre an  
ambassadourien ;  
Mes bremañ eo qer fachet, ma renq dont e hunanil  
D'o c'hask ha d'o funissan dre'r cleve ha dretan.
17. Allas ! O c'havet a ra cuzet en eur c'havern,  
Hag elec'h neuze souden terri o oU esqern,  
E ro urz da vassonat ar c'havern varnese,  
Evel pa vijent maro hag int leun a vue.
18. Penos, tirant infernal, honnes eo ar sentañs.  
Ordren ar brassañ supplis d'ar brassañ inosañs !  
Lacat en beo en douar seiz breur a galite  
Ennes a so un tourmant qen cruel ha qen bras,  
N'en deus nemert an ifern pe ar purgator voas.
19. Da viana mar deo ret e teufent da vervel,  
Ro deze ur maro al, tirant cri-ha cruel !  
Gwell eo mervel var ar rod, pe stag eus ur potañs,  
Pe grillet var glaou ardant evel ur Sant Lorañs
20. 20 Mes coll an ol sclerijen, beañ beo enteret,  
Languissañ gant ar famin, mervel gant ar sec'het,  
Ennes a so un tourmant qen cruel ha qen bras,  
N'en deus nemert an ifern pe ar purgator voas.
21. Assistantet catholic, n'en doc'h-u ket touchet  
Pa voelet seiz crouadur en buez entíret ?  
Demeus a greis o yec'het hag en o yaouankis  
Int plantet en ur c'havern, nonpas en un llis.
22. Allas ! Echu eo deze. Lezomp-int da vervel mourir,  
Pa na ellomp o sicour ; mes c'houi, Tad Eternel,  
Recevit o ineo da james en ho cloar,  
Pa hint evit ho lezen plantet beo en douar.
23. O Doue ol-buissant ! C'hui gonservas gwechal  
Ur profet hanvet Jonas, en korf un aneval ;  
Ur pesk hanvet ar Balen en loncas er mor bras,  
Hag er guaer a Nimve en tri dez en rentas.
24. C'hui gonservas Daniel e-kreis al Leonet ;  
C'hui a res da dri buguel kanañ er forn goret :  
Bremañ c'hui a les Seiz Breur entíret er c'havern  
Dre ordrenañs Decius, rak ma voant christenien.
25. Seitek vloas hag eiz-uguent e chomjont er plas-se  
Kent ma voe divassonet ar c'havern varnese ;  
An nep en devoa klevet e voant eno laket  
A sonje e voant maro hag int en poultr rentet.
26. Mes Doue ol-buissant pehini ne les ket  
An oevrou graet en e c'hloar ep bout recompancet,

- A digassas eur c'houset er c'havern d'ar Seiz Sant,  
Hag ho miras en keit-se demeus poan ha tourmant.
27. Rak pa voa bet ar Seiz Sant er c'havern entlret,  
Dre bermission Doue e Komañjont kousquet :  
Seitec vloas hag eis-uguent e voant hep difuni,  
Ken en des tud er c'havern hac o c'havet enni.
28. En istant ma voent cavet e zes partout ar brut,  
Hag a lakas estonet un nomb bras deus a dud,  
Mes ne voe qet hep rison, rak me a gret biscoas  
Ne voa bet klevet parlant e eur miracl ker bras.
29. Pa voe clivet qementse ep lakat mar ebet,  
An hol deus a Ephese a deuas d'o gwelet,  
Hag a yes hol d'an daoulin pa voant aru er plas  
Evit renti da Zoue meulodiou ha gras
30. Dre voyen eur planqen koevr a voe kavet gante,  
Elec'h ma voa ho hano skrivet hac ho bue,  
En seus permetet Doue, evit e vrassañ gloar,  
Gouzout pegueit a amzer e voent bet en douar.
31. Donet e eure qerqent ar maro d'ar Seiz Sant  
Evit kas o ineo d'ar joayou trionfant.  
Mar boant privet er bed-mañ deus an treo temporel,  
E jouissent er bed al deus ar gloar eternel.
32. Pegen evurus omp-ni entreomp, Bretonet, !  
Dre m'on beus ken bras tensor en parous Plouaret  
Rentomp graso d'an Drindet Tad, Mab, Speret-Santel,  
Da veañ graet d'ar Seiz Sant en hon bro eur Chapel.
33. Ouspen ar Chapel devot, eus c'hoas en he c'hichen  
Ur Feunteun gaer d'ar Seiz Sant hag he deus seiz soursen ;  
Seiz kanal int dre bere e ro Doue grasoù  
Hag e ra en peb amzer nombr bras a viraclo.
34. An dour-mañ a fortifi an nep so en yec'het,  
Hag a ro d'an soulajamant d'ar re so en klenvet ;  
Doue a ro d'an ene grasoù  
Ha d'ar c'horf nerz ha yec'het dre beden ar Seiz Sant.
35. Eur vroeg deus a Blouaret, a barous ar Seiz Sant,  
Katell David eo hanvet, a go eze en drouk sant ;  
En drouk sant Loup e koeze sivoas bemde goulo,  
Ma sonjet n'e c'huitaje qen a vije maro.
36. Goude beañ pel amzer er gis-se afflijet,  
Da visitañ ar Seiz Sant e zeo bet inspiret,  
En pelec'h deus kat ur remed exelant,  
Rak aboe ma voe eno, ne goeas en drouk sant.
37. Pieres ar Guillermic, demeus ar C'hos-Varc'hat,  
Afflijet gant ar derien, a yes dy gant e dad,  
Ha goude ma voe guelc'het en feunteun ar chapel,  
E resevas ar yec'het dre c'hrasoù an Eternel.
38. C'hoas Pieres Querivoal a barous Pluzunet,  
A voa gant an drouk gouzouk ken terribl afflijet,  
Un nos e voa ker fatig, ma sonjet e varvje,  
Pa voe goestet d'ar Seiz Sant ar yec'het en devoe.
39. Tud klañ gent peb sort klenvet, re gam hag  
O visitañ ar Seiz Sant a gev soulajamant.

- Ur vreg deus a Blouaret a gollas ar gwelet,  
Evit kement a gleske na gave nep remed.
40. Mont a ras gant he fried gant gwir devotion  
Da invokin ar Seiz Sant en he affliktion.  
He daoulagad a voalc'has en dour feunteun ar zent,  
Ma resevas ar gwelet ker scker ha dlaguent.
41. Arabat eo ankouant eur faveur exelant  
Graet da Vari Allin, dre beden ar Seiz Sant :  
Ne voa ket he diou vron peadra da vevañ  
Ur c'hrouadurik bihan he devoa e tenañ.
42. Mont a res vir galon de Chapel ar Seiz Sant,  
Da reketin nouritur da rei d'he inosant  
Mes a drugare Jesus hag e Vam ar Verc'hes,  
E teuas en he diou vron abondañs bras a leiz.
43. Daou vab Jacques ar Goffic a barous Trebeurden  
A voe enpad nao sizun klañ bras gant an derrien ;  
D'ar Seiz Sant e voent goestet, hag er memes instantoù  
E kuitteas o derrien kruel ha violant.
44. Merc'h Julien ar Piver demeus e Lannuon  
He devoe dre he c'hlenve ker bras a aflicsion  
Ne alle ket he-unan remui na kerzet,  
He diou gar a voa outi kasi maro rentet.
45. Digasset voe d'ar Seiz Sant gant he mam hag he zad  
Evit ober he feden ha goulen he menuad ;  
Alumet voe ar golo eviti er Seiz Sant,  
Hag e kerzas d'ar feunteun joaüs bras ha contant.
46. Miracloù a ret amañ en andret peb seurt tud ;  
An hol, paour ha pinvidik, memes al loened mud  
A sant ar protecsion deus an dorn puissant,  
En instant ma vent goestet da Chapel ar Seiz Sant
47. Chelouet a hoarveas gant un den insolant  
A deuas da laerez hed da Chapel ar Seiz Sant :  
Pa voa ho houren e vec'h e chom staguet outan  
Ken nes deut proision e barous davitañ.
48. Un nombr bras a viracloù a men c'hoas da laret,  
Panevert na abusen deus ho patiantet  
Kement a meus lavaret a so gwir ha constant :  
An neb o deus bet sikour a meus evit goarant.
49. N'en deus plas voar an douar pa deuer da bedin  
Ne el an Aotrou-Doue donet d'hon exosin ;  
Mes serten eo gouscoude penos en eus choaset  
PlaÁo en particulier da veañ henoret.
50. Ur Chapel graet gant c'huec'h men pa voe krouet ar bed.  
Ur Feunten a seiz soursen, kalz a viraclo' graetune  
A ro dimp sclær da velet eo ar Seiz Sant ur plasoù  
A so choaset gant Doue evit rei dimp e c'hrasoù.
51. Rak se mar hon eus desir da vonet d'an eñvo,  
Keit ha m'on eveus amzer klesqomp ar moyeno ;  
Greomp hon provision deus a grasoù Doue, Gant aon en heur ar maro n'on c'hafe dibourve.
52. Frekantet e ar Seiz Sant bemde enpad ar zun  
Gant tud deus a bep kontre, ispicial d'al Lun ;  
Mes ar Zul inkontinant goude ar Vadalen

E zeus pardon, induljanoù d'an ol gwir gristenien.

53. An induljanoù er bed-mañ hon rent kuit deus a boan.

A renker er purgator bea paset en tan.

Mui a dal un aktion entre omp en bue, \_Evit kant vloas er flamoù da burja un ine.

54. Profitomp hol, bugale, deus an okasion,

Demp en de-se d'ar Seiz Sant da c'honit ar pardon.

Goulennomp eno grasoù da vevañ ker santel

Ma veritomp er bed al ar joayou eternel.